



Sekretour-ez an Eil derez

Kinnig labour embannet d'an / ar mercredi 16 juillet 2025

Lec'h : **Landerne**

Doare post **CDI H/F**

27/08/2025

Deskrivadur ar post-labour

Ur c'hevread kevredigezhel, laik, digoust ha digor d'an holl eo Diwan. Hiziv an deiz ez eo an hentenn gelenn nemeti o kinnig deskiñ brezhoneg dre soubidigezh. Krouet ouzhpenn 48 vloaz zo ez eus e Diwan 48 skol, 7 skolaj ha 2 lise, dasparzhet war 5 departamant Breizh istorel.

Diwan zo o klask ur sekretour-ez evit e servij Eil derez. E-kreizig-kreiz servijoù melestradurezh ar c'hevread e voc'h kendivizer-ez lodenn vrasañ eus koskor an eil derez war statud publik pe brevez hag e degouezh e voc'h da labourat en un endro brezhonek.

Dindan atebegzh renerezh an Eil derez ha war sikour atebeg ar c'hoskor e vo fiziet ennoc'h kefridioù liesseurt a sello, ar c'hoskor, ar sekretouriezh rik hag ar merañ savadurioù an tiez skol.

Fiziet e vo ennoc'h :

-Kefredioù liammet gant renerezh eil derez

Kas ha respont d'ar goulennoù kaset gant an implijidi
Derc'hel doserioù melestradurel an implijidi, ar gelenerien
Ober war dro al lodenn velestradurel eus ar fiñvadegoù (renerien, kelenerien, kasour)
Skoazellañ aozadur ar bodadoù tuta kasourien ha kelennerien
Prientiñ ar pezhioù a vo ezhomm evit an emvodoù, sevel ha kas ar rentaoù kont
Heuliañ amzer labour ar gasourien hag an ezvezañsoù

Kefridioù liammet gant an tiez skol :

Ober war dro ar skoazell transport
Skignañ an arnodennoù AKED ha DIBAB evit an holl tiez skol
Aozañ forum an heñchañ en ur genlabourat gant renerezh an ti skol degemer
Renabliñ disoc'hoù ar skolidi d'an arnodennoù ha sevel statistikoù diouto

Skiant-prenet ha barregezhioù goulennet

Doare den :

Digor eo ar post-mañ d'an holl profiloù.

Diouzh ho stummadur kentañ pe ho skiant-prenet micherel e vo raktreset ur prantad stummadur diabarzh evit ma c'hellloc'h pakañ ar barregezhioù ret a-nebeudoù evit ar post-mañ.

Setu amañ barregezhioù mat da gaout evit ar post-mañ :

Mestroniañ ar brezhoneg kenkoulz dre gomz ha dre skrid (B2 pe C1 en DCL Brezhoneg) ;
Mestroniañ word hag excel ;
Anavezout an eil derez ;
Anavezout mat mont en-dro an Deskadurezh Stad.

Emren ha plijet gant al labour a-stroll ez oc'h strizh war al labour, aes gant an dud ha gouest d'en em azasaat buan ouzh un endro labour nevez.

Titouroù all :

Amzer labour : Leun amzer

Lec'h labour : Landerne

Kevrat : Didermen

Deiziad kregiñ : 27/08/2025

Gopr kregiñ : diouzh ho skiant prenet hag ar c'haelioù o talvezout e Diwan

Spletoù : gwarez yec'hed, prevoyañs

Koñjeoù paeet : 6 sizhun

Ma'z oc'h dedennet gant ar post, trugarez da gas ho emstrivadur a-raok an 22/08/2025 (CV + lizher emginnig) da tuta@diwan.bzh (mailto:tuta@diwan.bzh)

Raktreset eo ar bodadoù tuta d'ar 25/08/2025.